

## KIS-725 – *Diwan* ha heandizh<sup>1</sup> ar brezhoneg

(GE da LM – 30 04 01)

An turmud en dro d'an doare skrivañ, hor boa anavezet en e vog pemont vloaz 'zo, zo distavet. Un emgann kealiadurel oa anezhañ : FALC'HUN a veze arveret gant an Amaezhierarchy evit rivinañ ar saviad kenderc'hañ bet diazezet gant *Gwalarn* e-maez krap ar Stad ; MORVANNOU a voe dehouelet gant UDB evit tec'hout war un dro diouzh brud fall an eil Emsav ha diouzh krap an Amaezhierarchy — goude m'en doa MORVANNOU diazezet e skrivadur war hini MORDREL gant skoazell PENNAOD. Hiziv ez eo aet da get koulz lavarout an emgann kealiadurel, n'eo ket p'o defe an emgannerion emglevet, met peogwir ne reont mui anv a gealiadur. Pezh na dalvez ket e vent hep kealiadur : kealiadur an digealiadur zo unan c'hoazh hag an hini gwashañ.

Kaer zo dezhañ ober gant ar skrivadur o tisoc'h eus hil *Gwalarn*, en deus *Diwan* kemeret plas FALC'HUN & C<sup>o</sup> etre krabanoù an Amaezhierarchy. An testennoù nevez embannet gant renerezh *Diwan*<sup>2</sup> a ziskouez a-walc'h an treuzlec'hiañ a vez graet : tevel war an argraf istorel-politikel ha plediñ hepken gant kudennoù kalvezel (amaezhel-diougonadel). Hemañ eo savlec'hiad an Amaezhierarchy : kelennomp brezhoneg gant na ve mui a vrezhonegerion, alese taolomp pled ma vo ar brezhoneg kelennet an diazasañ gwellañ ouzh ar bed kempred — leviadur kentradet gant an Dispac'h gall ha kendalc'het arstalek gant an holl renadoù, impalaerel, roueel pe republikan abaoe, evel ma tiskouez da skouer an ditour roet e 1831 gant prefeded Côtes-du-Nord ha Finistère war-benn hastañ breinadur ar yezh<sup>1</sup>. Kempleg d'al linenn-se emañ LINCOLN pa

---

<sup>1</sup> Un degouezh eo evit reiñ buhez (mar galler lavarout !) d'an termen nebeut arveret c'hoazh bet luniet e kenlabour gant un aozer a laboure evit *Diwan* (sl. KIS-596, La-12, pp. 231-232).

<sup>2</sup> PROJET – Circulaire relative au programme de développement de l'enseignement des langues et cultures régionales à l'école, au collège et au lycée. Modalités de mise en œuvre de l'enseignement bilingue (9 p.). PROJET DE DECRET portant création d'un conseil académique des langues régionales (3 p.). PROJET – ARRETE relatif à la mise en place d'un enseignement bilingue en langues régionales [...] (2 p.)

<sup>1</sup> “Il faut par tous les moyens possibles, favoriser l'appauvrissement, la corruption du breton jusqu'au point où, d'une commune à l'autre, on ne puisse pas s'entendre... Car alors la nécessité de communications obligera le paysan d'apprendre le français. Il faut absolument détruire le

embann : “Hon amkan eo distreiñ d'ar stad m'edo ar yezh e 1920”, LINCOLN hag an dud a seurt gant ho kenvreur eus An Oriant !

(LM – 14 05 01. Kelc'hlizher)

Kavout a reot amañ ar respont am eus bet digant Kuzul diougonadel *Diwan*<sup>2</sup>. Ur respont nad eo ket unan e gwirionez ha nad eo diougonadel e mod ebet p'emañ “soliet” war ar mell bleupad m'eo mellad 6 dezvadoù ar gevarzhe evel ma oan engortoz. [...]

— Petra eo “yezh ar vro ha tud ar vro” evit skolioù Breizh-Uhel ?

— Petra e rankfe bezañ yezh ar c'helenn er skolioù kentañ derez, skolañoù ha lise ma ned eo ket “hini ar vro ha tud ar vro” (na dalvez nemet evit ar skolioù bugaligoù war a hañval) ?

— Emañ *Diwan* "a-enep kement unvanadur yezhoniel" (sic). Holl yezhoù ar bed o deus ganet kenyezhoù eus o strewadur rannyezhel. An hevelep labour a rener ivez en Euskadi hag e Katalonia. Perak ? Peogwir ez eo ar genyezhegezh a laka ar gevredigezh da c'heneh. Ha *Diwan* enta a ve ar skol nemeti n'he dije ket da bal lakaat he skolidi da

---

langage breton” (in *Histoire de la Bretagne et des pays celtiques*, Skol Vreizh, Montroulez, 1980, t. 4, p. 218). Trugarez da Mikael Coïc ha da Roger LE NESTOUR o deus kennaouet din an destenn-mañ. Sl. ivez KIS-712 – An Dispac'h gall hag ar brezhoneg, La-14, pp. 130-139.

<sup>2</sup> Da heul ur goulenn a-berzh Laorañs MOTROT, skolaer *Diwan* e Sant-Nazer, ma ve unvanaet ar yezh kelennet d'ar vugale, e voe embannet war *Skod-Tan*, kelaouenn diabarzh ar skolaerion, ur respont digant ur skolaer eus An Oriant oc'h erbediñ

en eneb arver an teodyezhoù evel araez ha danvez kelenn (sl. KIS-712, La-14, pp. 133-134).

Amañ dindan testenn ar respont :

“Landerne, d'an 11 a viz Mae 2001. Da heul ho lizhiri e tegasomp da soñj deoc'h eus Karta Diwan ha d'ar mellad 6 : “*Sevel a ra Diwan start a-enep kement unvanadur yezhoniel a zo. Tomm eo an doareoù sevenadurel liesseurt ma vez o c'henglokaiüsted, hervezi, ur vammenn da unaniñ ha kenbinvidikaat. Ar brezhoneg implijet e skolioù-mamm Diwan eo hini ar vro ha tud ar vro.*” Pep skolaer Diwan en deus da zoujañ d'ar mellad-se ha da Garta Diwan. Izili Kuzul pedagogel kentañ derez Diwan.

War-benn parraat ouzh ar c'holl stlenn e taveomp da destenn orin c'hallek *La Charte de Diwan* hag e roomp amañ da heul testenn ar mellad 6 :

**Article 6 •** Diwan déclare son hostilité à toute uniformisation linguistique et est attachée aux diverses formes d'expression culturelle, affirmant que seule leur complémentarité est source d'unité, d'enrichissement mutuel et collectif. Le breton enseigné dans les écoles maternelles Diwan est celui utilisé dans leur environnement géographique et humain.

berzhiañ en ur gevredigezh !? Emañ Roparz Hemon o treiñ-distreiñ en e voest 'm eus aon...

— Mar rank yezh ar c'helenn bezañ “hini ar vro ha tud ar vro” perak e oa deuet da Sant Nazer (da lec'h all ivez moarvat) skolaerion bep a vrezhoneg disheñvel ganto (perak n'o doa ket desket brezhoneg Gwenrann !?) ; ma rankje ur skolaer evit an abeg-mañ-abeg kemm skol bep bloaz, ha ret e vije dezhañ deskiñ an holl vrezhonegoù teodyezhel a gavje war e hent ?

— Grik ebet diwar-benn ar c'hudennoù komprenidigezh a sav dirak ar vugale a-dal d'ur c'hemm skolaer-skol / rannyezh pe deodyezh. Nevez zo c'hoazh e oa aet ur skoliad din d'ober anaoudegezh gant skolaj *Diwan* ar Mor-Bihan ha deuet en-dro o lavarout n'en doa komprenet hogos netra e-doug an daou zevezh-se...

Evidon a zo splann ivez ne gasin ket bugale zo o defe da gemm skol da skolioù 'zo (n'erbedin ket d'o c'herent e ober kentoc'h) pa vo anat e ve kenkoulz o c'has a-benn en ur voger. Pezh a zo grevus kenan peogwir ez eo anzav ez eus ur gudenn a ingalded etre ar vugale er skolioù *Diwan* pe lavaret en ur mod all ne ve ket gouest *Diwan* da skoliañ bugale zo abalamour d'an teodyezhoù arveret gant lod eus he c'helennerion.

(GE da LM – 17 05 01)

Kriz an enkadenn m'emaout, a zo un enkadenn bersonel da gentañ penn.

Diouzh savboent e Garta ez eo *Diwan* nozus ouzh bred ar vugale. Ne vez neptuet e nozusted, gant skolaerion evelvoud, nemet o terriñ e Garta. An Amaezhierz a anavez an dañjer ez eo *Diwan* evit ar vugale, met evitañ ez eo un dañjer keñverel ha war verr dermen rak, diouzh un tu, emañ ar galleg aze evit diogeliñ o diorreadur, diouzh an tu all, e tle *Diwan* mont da get war un dro gant dilerc'hioù diwezhañ an teodyezhoù.

Klask prouiñ da atebeion *Diwan* n'eus diazez d'o embregadenn nag er poell nag er werc'helezh ned eo ket diazezetoc'h : mar bijent kalonek a-walc'h da embreger ar poell ha da zezevout ar werc'helezh, o dije darbennet pell 'zo ez eo disol o afer. Da skoueraat an tec'hadur-se er-maez eus an devoudoù e kontin dit un hanezenn : e derou *Diwan* e oa deuet un ezel da 'm c'havout evit goulenn arc'hant diganin. Goude ar feukus ma kaven e c'houlenn (va gwenneion hepken en deurie ha n'eo ket va labour brezhonek nag an deskadurezh vrezhonek kentañ derez hor boa roet er gêr d'hon bugale), ez asantis e zegemer. E-doug un hanter eurvezh e tisplegis dezhañ dre ar

munud ne rofen ket skoazell d'un embregadenn na c'halle kas da netra en doare ma loc'he. An den a 'm selaouas gant pasianted. Pa verzhaz e 'm boa echu, ez atersas : “Se n'e' ket tout. Pegement a roit 'benn ar fin ?” Me ouie eo badet ar c'hefreoù gant ar “stourm breizhek”, met betek ar poent-se !

Komzet 'm eus a enkadenn bersonel evidout hag ar skolaerion a vez o kelenn ar vugale en ur wir yezh, rak e ober a reont o trozañ Karta *Diwan* hag an atersoù heboell a c'haller ober eo : pegeit amzer e c'hallint kenderc'hel ? ha dreist-holl : petra e teuy da vezañ ar vugale o devo kelennet ?

O lezel istor *Diwan* a-gostez, ez eus un aters all, boniek : ha poent ne ve ket prientiñ un aozadur kelenn, ha da gentañ stummañ, soliet e-keñver poell ha gwerchelezh (e-maez krap an Amaezhierezh, anat) ? Trevell divent, rak un deskadurezh vrezhonek dizalc'h a ampleg frammoù kevredadel, armerzhel, politikel ma vo gougevan outo.

(RLN da GE – 09 05 01)

Jacqueline, gwreg hon c'heneil GG, a anavez kalz tud a gas pe o deus kaset o bugale da skolioù *Diwan*. Hervezi eo arabat fiziout e *Diwan* ur bugel en devez kudennoù gant ar studiañ, rak gwallzisoc'hus ez a an traoù neuze. Gouez dezhi ez eus kerent a zo diemskiant : lakaat a reont o bugel da gentañ en ur skol vamm eus *Diwan*, peogwir ez eo houmañ an hini dostañ d'o zi, hag a-c'houdevezh en en kasont d'ar skol gentañ derez gallek, ma emgav ar bugel dianket ha ma teu buan da vezañ diwasket, e-pad hir pe hiroc'h amzer. Eviti ivez n'eus mar ebet : n'he deus pledet biskoazh gant ar brezhoneg, met kelennerezh hemañ n'en deus un dalvoudegezh bennak eviti nemet pa gelenner ur yezh unvan. Kalonekaus eo gwelout e vez darbennet diouzhtu hevelep savboent gant tud na ouzont marteze ger brezhonek ebet, a zalc'h avat o zreid war an douar.

(RLN da GC – 09 06 01)

E niverenn Mezheven 2001 *Kannadig Diwan* ez eus, p. 8, ur pennadig aozet gant Andrew LINCOLN<sup>1</sup> a-zivout un diskleriadenn gant Claude ALLEGRE. Lavaret en

---

<sup>1</sup> “POOR OLD MISTER ALLEGRE « *Il faudrait que la France fabrique des informaticiens sachant parler anglais, et on nous propose de fabriquer des bergers parlant breton ou occitan* »

doa an ezmaodiern : “Ret e vefe da Frañs dedeurel stlennegourion o c'houzout komz saozneg hag e kinniger deomp dedeurel bugulion o komz brezhoneg pe okitaneg !” Piv a ziskouez dispriz ouzh tud ar werin, ALLEGRE pe ar re a fell dezho advac'hañ Breizhiz er geto kefredel m'edont gwechall ? Ha n'en deus ket LINCOLN e unan diskleriet e oa e bal distreiñ d'ar stad a draoù eus 1920, pa n'o deveze Breizhiz da araez eztaoliñ nemet teodyezhoù keltiek paour, a-vec'h pinvidikaet un disterig gant gerioù gallek, ha bihan tre o astenn douaregorel ?

Mard eo galleg *Kannadig Diwan* unan a live mat, e chom brezhoneg ar gelaouenn unan graet evit stummañ kouerion henvoazel, evel m'en skriv Laurent MOTROT. Kemeromp skouer ar pennad brezhonek p. 17 a zo troidigezh pennad gallek ar bajenn gent. Talbenn gallek ar rannbennad diwezhañ : “Une année de pré-formation” zo bet roet dezhañ da gevatal brezhonek : “Ur bloavezh ispisial a-raok mont en IUFK”. Dres eztaoliñ dizampart ar vrezhonegerion henvoazel pa gomzent eus traoù a oa er-maez eus o bedig dezho. Arabat krediñ ez eo dic'houzvez ALLEGRE eus izelded live ar brezhoneg kelennet e skolioù *Diwan* ; ha ned eo ket kalz gwelloc'h moarvat hini ar yezh kelennet er skolioù heñvelek eus Okitania.

Arc'hant an Deskadurezh vroadel a zeu eus telloù paeet gant kevrozourion Frañs a-bezh. Ar gwir o devez ar re-mañ da c'houlenn petra a vez graet gant an arc'hant a dalont. (Dre eurvat evit ar gouarnamant gall — hag evit an holl c'houarnamantoù — e vez chalet ar gevrozourion peurliesañ kalz muioc'h gant sav o zelloù eget gant an arver a vez graet anezho a-c'houdevezh.) N'eo ket droch tamm ebet “suggestion”, erbedadenn ALLEGRE : mar fell d'ar ranndirioù stummañ bugulion, kouerion henvoazel, ez eo o afer, met n'he deus ket ar Stad d'o harpañ en degouezh. Kalz gwelloc'h he deus d'ober.

Emañ ar gwir penn da benn gant ALLEGRE. N'eus ket avat eus ar “poor old mister Allègre”, evit adkemer termenou LINCOLN, ur politikour soutil evel Jack LANG, ha setu perak eo bet berrbad e remzad a vaodiern. Ned eo ket ken barrek ALLEGRE hag hon louarn kozh evit c'hoari komedioù link meurbet, evel an hini a zo o

---

(France Inter, le 30 avril). Cette critique de Claude Allègre concernant le plan de Jack Lang pour l'enseignement des langues régionales est troublante. Elle témoigne d'un mépris, étonnant chez un homme de gauche, pour les couches populaires qui historiquement ont parlé ces langues. [...] Enfin, vu le peu d'importance qu'il attache à ces langues, sa suggestion que leur enseignement soit pris en charge par les régions et non par l'État revient à dire que les régions sont bonnes pour le folklore mais que les matières sérieuses sont uniquement du ressort de Paris. C'est une caricature de l'idée de subsidiarité. **NOUS SOMMES TOUS DES BERGERS OCCITANS.** *Andrew Lincoln « Goémonier breton » (anglophone).*”

paouez ober eus *Diwan* ur benveg dispar etre daouarn ar Stad c'hall a-enep ar brezhoneg.

Aozer ar pennad a sin : “Andrew LINCOLN, goémonier breton”. Bezhinaer eo LINCOLN evel ma oa George SAND labourerez douar. Ac'hoel he deus houmañ kenderc'het traoù deurus, pezh nad eo ket an degouezh evit kadoriad *Diwan*.

(RLN da GE – 30 08 01)

Er sizhun-mañ eo c'hoarvezet din koaniañ en ur c'hafedi-preti e Lanuon, ha tro 'm eus bet eno da selaou ouzh ur skinva brezhonek (ne 'm eus ket gouezet pehini oa). Daoust ma rae komzerion ar skinva gant ur yezh warni ul liv un tammig trefoedachek, ez on deuet a-benn evelkent da heuliañ well-wazh an emzivizoù. Kaset e oa ar re-mañ, anat, gant tud yaouank, deuet en oad da glask ur gourc'hwel, a oa avat dizampart hag arnesadek o eztaoliñ, evel pa vijent bet kouerion vrezhonek henvoazel, evel pa vijent bet int o unan ivez estren d'ar bed arnevez hag e se kondaonet d'e zeskrivañ en un doare diresis. Ne gav ket din evelkent e oa eus an emzivizerion-se tud bet desavet en ur metou brezhonek a-ziwar ar maez : re yaouank e oant evit se. Er skol eo o doa desket ar yezh : daoust d'e eilstummoù rannyezhek e oa o brezhoneg dezho re dost d'ar gwalarneg evit bezañ bet desket en un atant a wechall. Emañ ar gwir gant Claude ALLEGRE : ar skolioù divyezhek a stumm e Breizh kouerion henvoazel, hag en Okitania, a zo kalz meneziekoc'h ha dre se diaesoc'h da lakaat dindan c'hounid, e stummont bugulion moarvat.

Heboell eo soñjal o dije an kez emzivizerion prezeget en un doare ampart ha resis mar o dije pleustret war an hevelep divoudoù e galleg. Spi hon eus ac'hoel. Met gant petra e klot neuze skolioù divyezhek Breizh ha re ar broezioù trobarzhiat all ? En arvar da adlavarout, e haeran ez eus gant an dezvad kefridiel bet roet dezho an hevelep ster ha gant endorniadur Monsieur Jourdain da “mamamouchi” er *Bourgeois gentilhomme*. Ne dalvez ket an endorniadur-se da lakaat an entitled nevez da gemer renk e bonez uhel an Impalaeriezh turk, met d'ober dezhañ asantiñ da zimeziñ e verc'h gant he c'hefriza. Pa ro ar gouarnamant gall ur staelad kefridiel da skolioù *Diwan*, n'o deus e balioù netra da welout gant dazont ar sevenadur brezhon : er c'hontrol e oar ervat eo truezek live ar brezhoneg kelennet er skolioù-se, pezh a zo splotus meurbet evitañ. En daou zegouezh e korvoer un hunvre, ha ket unan a c'hell dont da wir marteze war hir dermen, met unan hep an disterañ sol er werc'helezh : me zo uhelvrientin turk, ni a ya da sevel ur sevenadur meur e Breizh diwar an teodyezhoù (daoust ha ne ro ket ar

stadegoù da c'houzout ez eus c'hoazh un daou c'hant mil pe un tri c'hant mil bennak a vrezhonegerion ?)

Hag arabat dont da gomz, evel m'en deus graet Andrew LINCOLN ur wech, eus dispriz ALLEGRE ouzh poblañs Vreizh pe Okitania. Atebek kenan eo er gin emzalc'h an ezmaodiern a 'n deskadurezh : n'en devez ket an disterañ c'hoant da welout Breizh, Okitania ha taredoù all oc'h adsankañ en arlezadegezh m'edont n'eus ket gwall bell c'hoazh.